

AVEL HON LENNEGEZH O C'HWEZHAN (29)

« Dreist hiboud an avel e krenerezh an draonienn eo savet ar c'han, ha leuniet en deus an oabl e kostezioù ar Wern ha Rozmeleneg. Nijal en deus graet da ober tro dreist an dour, frizañ a-hed ar girzhier, ha neuze dont da skeiñ betek ennon-me.

Emaon amañ o c'hortoz n'ouzon dare pe zarvoud da lakaat un tammig lusk em faour kaezh buhez brevet.

Ha du-hont evelato e oa ur vouezh seder o kanañ ha levenez hag he hiraeczh, ur c'hoant ha na c'hellje den he gwalc'hiñ.

'Deuit ganin-me da gompézenn al Levenez.'

Ur vouezh sklintin ha don. Ur vouez maouez. An hañv a oa, ha dec'h en doa pep hini flouret e zaoulagad gant louzaouenn an tantad, tommet ouzh ar chlevezenn. Ha ne felle ket d'an noz diskenn daoust d'ul latarenn wenn da guzhat ouzhimp an oabl ha da lakaat pep trouz da vougañ, pe da dregern, hervez he falatazi diroll. Ne gleved ket ur vouezh. Karr ebet na storloke. Ur vilfid he doa kanet war ar bod, ha tavet, ha neuze ar sioulded gant he bizied mibin he doa ledet he mantell war ar vro ha leuniet an oabloù gant he mouezh kalz kreñvoc'h eget mouezh ar bed en e bezh.

'O ! mar goufec'h e teufec'h 'vit atav !'

Ar c'han-se en doa sklintinet neuze ha tarzhet a-dreuz al latar evel dre ur wask, ur frailh. Evel ma vije bet en un taol chel e-barzh an ec'honder gloanek-se. Difukañ a reas evel dour war c'horre ur glerenn skorn, leuniañ an draonienn, ha neuze mont da lipat an torgennoù, damanavezet a-dreuz ar vogidell, evel ramzed, o kreskiñ dre ma teu an amc'houlou. »

Jakez, ar Jakez Helias a lâre penaos barzhonegoù zo gant ur Jakez all, ar Jakez Riou, o dije gallet bezañ stummet evel danevelloù. Ar c'hontrol zo ivez, avat. Danevelloù zo zo ken barzhoniel, zo ken intret gant lusk ar gerioù, lusk an trivliadennoù, lusk ar soñjezennoù... m'o dije gallet bezañ bet patromoù barzhonegoù.

Barzhoniezh pe komz plaen, doareoù lennegezh en gourc'hemenn ar varzhed, ar skrivagnerien. Dezhe da c'hallout tizhout kalon ha spered o lennerien.

Kongar, hon C'hongar, a oa a-boan 25 bloaz pan vannas e zanevell « Gant blaz an avaloù ruz ».

Kounnar, c'hoant lonkañ ar bed, c'hoant ivez disklêriañ ar garantez, ha n'eo ket e garantez dre ret, dre natur. *Gwalarn* : piv a c'hall en dez a herie empentañ da vat pegen nevez e oa. Karantez an evned bihan, ar bleunioù dispaket, ar mor glas, ar gwiskamantoù hengounel gant o zogoù ront, gant o rubanoù o tivilhañ en avel an douristelezh pe c'hoazh karantez an dañsoù gant koefoù pe dibunet dindan un aer biniou bennak, karantez ar sistr hag ar c'hig-ha-farz, ar c'houign amann. Ya, karantez ur gartenn-bost madelezhuz ha teneraus da zegas gwenneien d'ar brofitourien.

Nann, Gwalarniz o devoa kredet, se eo ar ger, kredet esteurel ar pezh a soñjent, ar pezh a vevent, ar pezh o lakae da drivliañ, ar pezh a lakaent en o soñjoù leun a c'hoanag hag a gounnar... Gwalarniz o devoa lakaet ar yezh hag al lennegezh en penn-araog o c'hredenn. Bevañ, krouiñ ha soñjal en o yezh.

Kongar, zo bet skrivet meur a wezh, e oa pinvidik e yezh. Re wir, re wir. Evel pa vije ur rebech avat. Padal en e skridoù kizellet, turgnet, n'eus ket ur ger a re. Me gav din eo unan eus ar reoù, en o mesk, hag o devoa graet al liamm etre barzhoniañ ha danevelliñ.

« Ha neuze e oan abaf. He c'hlasket am boa dindan meur a stumm, ha n'am boa ket he c'havet.

Gouelet am boa dezhi ha ne oa ket deut davedon. Aspedet am boa ma teuje da gomz din, hag en deiz-mañ ma oa deut n'am boa ket he anavezet, na degemeret ar c'hinnig a rae din. Ha bremañ he c'hleven, dreist da sked an abardaez, dreist d'ar gwez, dreist d'ar c'hêrioù, uheloc'h egeto holl, ha bepred o vont atav gant he galv hiraeczhuz, - a gavas din a oa din –

'O ! mar goufec'h e teufec'h 'vit atav !'

ur galv trenk, ha tener koulskoude evel an avaloù edo o tougen. »

Blaz an avaloù, blaz ar garantez pe blaz he galv da vihanañ. Karantez Jakez Riou ne zeue ket, hini Kerverzhioù ne gleve ket ha ne wele ket. Mouezh an hini hetet. Petra deneloc'h ?

Ne baouezimp ket a lenn hag a adlenn an danevell-se. N'eo ket peogwir e adkas da soñj dimp un dra hon defe bevet. Nann, mar plij, peogwir eo gwirion an danevell ha leun a gizidigezh hag a zenelezh. Peogwir eo savet war framm eskeroù kouc'h hon lennegezh vodern hag a gred leuskel hon zrivliadennoù da zispakañ... kaset gant an avel a-du...

Salokras, ur skrid evel « Gant blaz an avaloù ruz » zo ur skrid meur. Ur skrid da dizhout hon c'hreiz. Kizidigezh ha galv an natur en hon gwrez.

« Ur vilfid he doa kanet war ar bod, ha tavet, ha neuze ar sioulded gant he bizied mibin he doa ledet he mantell war ar vro ha leuniet an oabloù gant he mouezh kalz kreñvoc'h eget mouezh ar bed en e bezh. »

Hag evel ma skrivas Kongar, mar goufec'h e teufec'h evit atav....

Herve Bihan

Levrlennadur

Divi Kenan Kongar, Gant blaz an avalou ruz, Gwalarn niv. 98, Genver 1937, pp. 9-19.

Jakez Riou, Serr-Noz, Gwalarn, niv. 29, Ebrel 1931, p. 13.

Kerverzhioù, Barzhonegoù, Al Liamm – Tir Na n-Óg, 1955, 128 p.